



Ar Ragistor

KLASK KELEIER

Evit respont d'ar goulennoù, klask ar respontoù war ar pajennoù merket.

	Sell ouzh ar bajenn
1. E pelec'h emañ mirdi ar Ragistor ?	1
2. Petra eo un alez-toet ?	2
3. Peseurt doare tud a veve e Menez Dregan ?	3
4. E peseurt mare o deus kroget tud ar Ragistor da labourat an douar ?	7
5. Pegoulz eo bet lakaet en e sav en-dro peulvan Prad Ledan e Plabenneg ?	4
6. Peseurt rummad tud o deus kroget da lidañ ar re varv ?	6-7
7. Peseurt rummad tud o deus kroget da implijout an tan ?	6-7
8. Da betra e servij ar peulvanoù ?	2
9. Petra 'zo e-barzh karn Barnenez ?	5
10. Peseurt ostilhoù zo bet kavet e kambroù karn Barnenez ?	5
11. Petra a veze implijet evit chaseal ?	8
12. Petra a veze implijet evit pesketa ?	8


Evit gellat respont gwir pe gaou, sell ouzh ar pajennoù merket.

	Gwir	Gaou	Sell ouzh ar bajenn
1. Labourat an douar a rae an <i>Homo Neandertal</i> .			7
2. Douaret e veze ar re varv dindan ar peulvanoù pe ar mein-hir.			2
3. An alezioù-toet a veze goloet gant un durumell.			2
4. Graet e veze armoù gant eskern.			8
5. Livañ diabarzh ar c'hevioù a rae an <i>Homo habilis</i> .			6

Lenn skeudennoù

	Sell ouzh ar skeudennoù er bajenn
1. Pelec'h emañ Barnenez?	5
2. Penaos e veze malet ar greun?	8
3. Peseurt ment e oa an arched e maen?	2
4. Petra eo un durumell pe un tumulus?	2
5. Peseurt pouez e oa an <i>Homo Neandertal</i> ?	7
6. Peseurt binvioù a veze implijet gant an dud ragistorel?	6-7
7. Gant Petra eo graet mogerioù diabarzh Karn Barnenez?	5


Gerioù-kroaz



1. Studial a ra ar Ragistor.
2. Prantad hirañ ar Ragistor.
3. Kêr Bro Vigoudenn e-lec'h m'emañ staliet mirdi ar Ragistor.
4. Ur maen lakaet en e sav.
5. Ar pezh a ra an arkeologourien.
6. Metal a vez kavet en douar. Graet e vez ostilhoù gantañ.
7. Prantad ar Ragistor a dalvez oadvezh ar maen nevez.
8. E-barzh ur bez e vezont kavet.
9. Kregiñ a ra gant ar c'hanedigezh hag echuiñ a ra gant ar marv.
10. Er vered e vezont kavet.
11. Ur bern mein e-giz e Barnenez.
12. Meskaj etre ar staen hag ar c'houevr hag anv un oadvezh.

Brezel an tan

Ur wech e oa bet arnev ha kurun. Gant al luc'hed eo kroget an tan en ur wezenn. Dastumet en doa an *Homo erectus* ur skourr, tan ennañ ha kaset anezhañ d'e gêriadenn. Eno e kendalc'he an tan da zeviñ rak an den ragistorel a vouete anezhañ dizehan, kuit dezhañ da vervel. An tan a oa ur binvidigezh. Pa varve e oa ur gwall dra rak ne oa ket aes c'hoazh d'an *Homo erectus* ober tan. Klasket e veze neuze laerezh an tan digant ur meuriad all e-giz ma vez kontet er romant *Brezel an tan*.



Marv e oa an Tan. Savet e veze ganto abaoe orin ar meuriad e teir c'haoued. « Peder maouez ha daou vrezelour e vage noz-deiz. [...] E zremm greñv a bellae al leon du hag al leon melen, arzh ar mougevioù hag an arzh louet, ar mamout, an tigr hag al loupard; e zent ruz a ziwall mab-den diouzh ar bed divent. Tennañ a rae digant ar c'hig ur frond saourus, kaletaat a rae beg an armoù ha lakaat ar mein kalet da darzhañ; an izili a denne dioutañ un douster leun a nerzh. [...] Bez' e oa anezhañ war un dro an Tad, an Diwaller, ar Saveteer, feulsoc'h koulskoude, terruploc'h eget ar mamouted pa dec'he diouzh e gaoued ha pa lonke ar gwez. Marv e oa! Div gaoued a oa bet distrujet gant an enebourien... »

Brezel an tan, J.-H. Rosny Henañ, brezhoneg gant P.-J. Keraveg, Mouladurioù Hor Yezh 1996

Aada ha Narki

Istor Aada ha Narki a dremen e Breizh e Plougerne hag e Gwiseni da vare ar Mezolitik. Daou zen yaouank, paotr ha plac'h, Aada ha Narki en em gavo ha pa ne vijent ket eus memes meuriad.

An daou destenn-mañ tennet eus al levr skrivet gant Goulc'han Kervella a zispleg penaos e veze chaseet d'ar mare-se ha petra a veze graet gant ar c'hirvi-meur lazhet ganto.

Chaseal

Un tamm trouz, ur skourr o strakal, a dorras huñvre Aada. Chom a reas a-sav « war api darev da lammat. Kaout a reas dezhañ e oa un aneval, peseurt hini oa?

tost outañ. Tennañ a reas ur saezhenn diouzh ar gouhin ha stegnañ e wareg. Gant ur gorzenn oa graet ar bir, ur maen-tan begok en ur penn hag ur bluenn labous er penn all. Gwial a oa oc'h ober ar wareg hag ur vouzellenn c'harv. A gammedoù skañv, didrouz-kaer, ez eas Aada war-raok, daoubleget e gorf. Ken e welas un hoc'h gouez o tifoupañ er-maez eus ur brouskoad, ur wiz oa kentoc'h, un torad perc'hell bihan war he lerc'h... »



Petra 'veze graet gant ar c'hirvi-meur

Chaseal ar c'hirvi-meur a veze graet. Un aneval dispar oa ar c'harv-meur koulz evit ar c'hig, ar « c'hroc'hen, an eskern hag ar c'herniel. Poazhet e veze ar c'hig, ha n'eo ket o debriñ ez-kriz evel ma raed gwechall-gozh-gozh.

Gant kefioù gwez kroaziet ha stegnet krec'hen kirvi outo o doa tud ar meuriad savet teltennoù war ur gompezenn vras. Krec'hen all a oa bet kivijet ha stegnet da sec'hañ evit ober dilhajoù da zalc'her tomm. Merc'hed a oa o tispenn kig ar c'hirvi lazhet, lod all a oa o lakaat anezho da boazhañ ouzh ar ber. Gant mein lemm e raent o labour. En-dro dezho e oa bugale o c'hoari gant pri. Ur gwaz a oa o sevel binviji-chase hag higennoù-pesketa gant kerniel hag eskern ar c'hirvi. »

Hervez *Aada ha Narki*, Goulc'han Kervella, Al Liamm